


KEAV - 2024



KELEIER KEAV : UR SIZHUNVEZH EVIT OBER ANAOUDEGEZH GANT BED AR RADIO

Labourat a raimp a-hed ar sizhun evit ober anaoudegezh gant bed ar radio.

Oberiant e vo ar stajidi. **Pal ar staj a vo fardañ un abadenn bemdeziek, Keleier KEAV, danvez radio liesseurt enni** (kronikennoù, atersadennoù, reportajoù, faltazioù radio hervez c'hoantoù ar stajidi).

Skignet e vo an abadenn war ar c'hamp bemnoz. Da heul ar staj e vo lakaet an abadennoù e podcast war lec'hienn Radio Kerne.

- Tañva teknikoù ar radio :

Komz ouzh ar mikro, prientiñ ha kas un atersadenn da benn, skeudenniñ ur reportaj gant ar son, sevel kronikennoù, sevel blenier un abadenn.

- Ober anaoudegezh gant ar binviji teknik :

Implij ur son-enroller hag un daol veskañ, meziantoù frammañ.

Ne vo ket kemeret ouzhpenn 10 den er rummad-se.

Gwelloc'h eo d'ar stajidi bezañ en o aes gant an urzhiataerioù.

A-benn kaout muioc'h a ditouroù e c'hellit kas ur mail da : atalierou@radiokerne.bzh

	LUN	MEURZH	MERC'HER	YAOU	GWENER
MINTIN	Kinnig ar radio, program ar sizhun Kwizz (ar radio e brezhoneg) Deskiñ implijout binviji enrollañ	War an dachenn : Mont da atersiñ tud ar c'hamp Skrivañ kronikennoù	War an dachenn : Mont da atersiñ tud ar c'hamp Skrivañ kronikennoù	War an dachenn : Mont da atersiñ tud ar c'hamp Skrivañ kronikennoù	Prientiñ abadenn fin ar staj Skrivañ an abadenn
GOUDE-MERENN	Dibab danvez an abadennoù : atersadennoù, kronikennoù, reportajoù. Sevel bleiner an abadenn Stummadur war ar skritur radio	Frammañ ar pennadoù-komz Skrivañ an abadenn Enrollañ "Keleier KEAV-1"	Frammañ ar pennadoù-komz Skrivañ an abadenn Enrollañ "Keleier KEAV-2"	Frammañ ar pennadoù-komz Skrivañ an abadenn Enrollañ "Keleier KEAV-3"	Frammañ ar pennadoù-komz Enrollañ abadenn fin ar staj
DIOUZH NOZ		Selaou an disoc'h	Selaou an disoc'h	Selaou an disoc'h	Selaou an disoc'h